

KELEIER AN NAONED

Priz ar
skouerenn
3^e



NIVERENN 9

DU 1976

**KELEIER
AN
NAONED**

Kelaouenn viziek
embannet e Naoned

Rummad nevez

Burevioù : 79, quai
de la Fosse
44000 NANTES

Tl-moulerzh :
COPIE 22 Pedernez

Niver a skouerennou
tennet eus an niverenn
mañ : 500

Koumanant-bloaz :
25 F (dek niverenn)

Koumanant
-skoazell : 50 F

Kregit a ra ar c'hou-
manantou e penn-ken-
tañ ar bloaz

Merourez : an Itron
Gwenola
ROSSINYOL
11, rue de l'Ascension
44700 ORVAULT

Kont-bank : Niverenn
58 190 1081 - Banque
Populaire Bretagne
Atlantique - Agence
du Pont du Cens,
40, route de Rennes
44300 NANTES

An holl bennadoù emban-
net e-barzh KELEIER en NAO-
NED a c'hell bezañ ademban-
net e kelaouennou all gant ma
venezeg o orin. Aotro an aozur a
zo da c'houlenni evel-just evit
an holl bennadoù sinet (skrivañ da
renerezh ar gelaouenn).

Luc'hskeudenn ar golo : Jimmy CARTER (luc'hskeudenn U.S.I.S.),
danvez-presidant ar strollad demokrat e dilennadegoù an 2 a viz Du 1976
er Stadoù-Unanet

Lizhiri

Diwar-benn ar saverezh listri e Bro-Naoned

... Gant dudi em eus lennet pennad Ernest MENARD diwar-benn ar saverezh listri e Bro-Naoned (niverenn 5, Mae 1976, pp. 11-16). Ur fazi a zo en em silet moarvat en destenn (pajenn 16) : priz un eoullestr bras n'eo ket 300 000 F evel-just, 300 000 000 F ne lavarant ket ! Hag un draig all c'hoazh (pajenn 14) : n'eo ket e 1970 met e 1790 e oa 2 558 lestr e porzh an Naoned ! Ne oant ket ken bras hag al listri a-vremañ evel-just !

Marteze ez eus tu da lavarout c'hoazh un nebeut traoù diwar-benn chanterioù Sant-Nazer, a anavezan mat. Bez ez eus 10 000 den o labourat enno, 7 000 o sevel listri ha 3 000 oc'h oberiata kefluskerioù bras evit al listri pe evit traoù all. Micherourien ar chanterioù a zo hiziv e-touez ar vicherourien baet gwellañ e Breizh : 216 eur, da lavarout eo war-dro 40 000 F evit ar bloaz. Ret eo lavarout ez eus er chanterioù sindikadoù kreñv hag un hengoun kozh a stourm evit difenn gwirioù al labourerien. Ouzhpenn-se, n'eo ket forzh piv a c'hell labourat er chanterioù. An holl vicherourien enno pe dost a zo tud desket mat ganto o micher ha forc'h enno gant frouezh o labour. Sevel ul lestr n'eo ket tamm ebet heñvel ouzh al labour leuniañ boestou-mir gant piz-bihan pe al labour-gwriad tammoù danvez d'ober pezhioù-dilhad buan ha buan.

Bez e oa er pennad luc'hskeudennou kaer eus an eoullestr bras BATILLUS. N'hoc'h eus ket resisaet en ho pennad petra a dalveze e 550 000 tonenn. Anat eo n'eo ket pouez al lestr rak mont a rafe diouzhtu da strad ar mor, pouez an eoul a c'heller lakaat e-barzh ne lavarant ket. Pouez an eoullestr BATILLUS pe hini e vreur BELLAMY (a guitaio Sant-Nazer en deizioù-mañ ivez) a zo e gwirionez 72 000 tonenn. Ret eo implijout 80 000 tonenn dir evit sevel ur seurt lestr ramzel (an diforc'h a zeu eus an holl dammoù dir a zo troc'het, an toullou a zo graet er follennoù-houarn, h.a.).

Me gav din e vefe talvoudus displegañ un tammig d'al lennerien penaos e c'hell chanterioù Bro-Japan gwerzhañ o listri 40 % marc'had-matoc'h eget chanterioù ar c'hornog, chanterioù Breizh da skouer. N'eo ket evit abegoù kalvezel (teknik). Chanterioù Sant-Nazer a zo ken bras ha ken arnevez ha chanterioù Japan. War dachennou 'zo ez int aet zoken pelloc'h war-raok...

E Japan ez eo izeloc'h ar goprou. Gwir eo c'hoazh un tammig met an diforc'h n'eo ket mui ken bras-se, kresket o deus ar goprou e Bro-Japan ivez abaoe ugent vloaz (gwir eo avat evit broioù isdiorret evel Korea ar Su hag he deus bremañ chanterioù bras ivez). Kalz

izeloc'h eo ar c'hargoù kevredigezhel (kedskor, h.a.) e Bro-Japan eget e Breizh hag e Kornogeuropa dre vras. Kalz berroc'h e o ivez an ehanou-labour e Bro-Japan. Kalz tud a labour c'hwec'h dez ar kizhun, ar vicherourien n'o deus ket muioc'h eget div sizhunvezh vakañsoù er bloaz. E Breizh avat ez eus peder sizhunvezh vakañsoù hag ur bern devezhioù dilabour c'hoazh (gouelioù ha (pontoù)). Labourerien Sant-Nazer a labour mat ha start, gwelloc'h eget re Norzwerzhon pe Bro-Skos, din da c'houzout met ne labouront ket tamm ebet evel ar Japaniz. Ar re-mañ a seblant deomp labourat evel tud foll. Mont a reont d'o labour o redek ! Labourat a reont dibaouez e-pad o devezh-labour, hep komz kenetrezo, hep treiñ o sperd diwar o labour. Kement-mañ hepken a zo kaoz un diforc'h kenderc'husted 10 pe 15 % etre chanterioù Europa ha re Japan. Ouzhpenn-se, n'eus ket harzoù-labour e Bro-Japan pe dost (a-wechoù zoken paz eus un 'thuz-labour' e Japan, e kendalc'h ar vicherourien da labourat met dougen a reont neuze ur skritell war o fenn evit diskouez d'o fatron n'int ket laouen gantañ !!!).

Iskiz e seblant moarvat an emzalc'h-se evidomp-ni. Bretoned, ur baradoz e tle bezañ ar vro-se evit ar batroned ! Ret eo gouzout avat n'eus dibab ebet evit Japaniz. Gouest eo douar


WANIG HA WENIG



**UR GELAOUENN VREZHONEK
AOZET GANT TUD YAOUANK
EVIT TUD YAOUANK**

Breizh da vagañ he foblañs ha zoken da werzhañ boued d'ar re all (level m'eo bet gwelet splann e-pad ar brezel diwezhañ da skouer pe c'hoazh hiziv), Japan avat a zo ur vro baour-razh ; n'eo ket gouest al labour-douar enni da vagañ ouzhpenn 30 % eus ar boblañs. An diskoulm nemetañ a zo aloubiñ broioù all, enno pinvidigezhioù n'eus ket e Bro-Japan (pezh a zo bet graet daou-ugent vloaz 'zo p'edo armeoù Japan oc'h aloubiñ tamm-ha-tamm Korea, Mandchouria, Taiwan, ha broioù all evit kaout riz, glaou, houarn, h.a.), pe aloubiñ marc'hadoù all dre werzhañ enno marc'hadourzhioù graet abaoe ugent vloaz. Anavezout a reomp holl ar motoioù HONDA, an eurieroù SEIKO, ar binvioù-luc'hskeudenniñ CANNON, ar skinwelerezed SONY, ar c'hirri-tan TOYOTA, h.a... Gant an arc'hant gounezet e giz-se e c'heller prenañ boued ha danvezioù kraet en diavaez. Un doare brezel a zo renet eta gant Japaniz hiziv evit ma c'hellfe o bro dreistbevañ ha mont war-raok. Setu perak ez eus er vro bell-se un doare (unvaniezh sakr), un aergelc'h-brezel (heñvel un tammig ouzh an aergelc'h a rene e Bro-Saoz etre 1940 ha 1945), ha, da heul, emzalc'hoù a zo a-wechoù diaes deomp da gompren...

M.G., Sant-Nazer



Pell 'zo am boa c'hoant da skrivañ deoc'h evit kas deoc'h ma gwellañ gourc'hemenoù diwar-benn **Keleler an Naoned**. Ur gwir blijadur eo gwelout ur gelaouenn ken buhezek o tont er-maez en Naoned d'ar mare-mañ. Buhez hir d'ar (babig) nevez c'hanet ! Gwelout a ran o lenn an niverenn gentañ hoc'h eus Ivona Riou evit ho sikour gant hec'h alioù gouizie !

Bourrus am eus kavet an niverennoù am eus bet betek vremañ : pennadoù a bep seurt a gaver enno, un dra da vezañ meulet ! Kendalc'hit eta gant an hent-se ha sur on e kresko ar gelaouenn ingal hag ingal en amzer-da-zont.

E-touesk ar pennadoù a embannit war zanvezioù disheñvel e vez lod anezho tennet emic'hañs diwar embannadurioù tekneg e galleg ; ar re-se a zo ganto, meur a wech, blaz an droidigezh. Evel-just, n'eus tra ebet ken diaes ha treiñ pennadoù tekneg pe skiantel, abalamour d'ar gerioù ha dreist-holl d'an troioù-laver implijet er yezh a orin, pa ne vezer ket boas da verat seurt menozioù ha danvezioù e brezhoneg. Hir ha diaes eo al labour-treiñ eta, dreist-holl pa na vez ket an troer gouizie war an danvez end-eeun, emañ o lakaat e brezhoneg. Ar gwashañ 'zo, galleg zo ur yezh a gar ar gerioù bras hag ar frazennoù c'hwezet. Pa lavar ar Saozon er radio, da skouer : «To-morrow there will be rain an snow», ar C'hallaoued a lavaro : «Demain, on peut envisager des possibilités de sérieuses précipitations atmosphériques». Gwelout a rit dibuzhu petra 'm eus c'hoant da lavarout. Siwazh, ar pep brasañ eus an danvezioù a sell ouzh Breizh a vez embannet e galleg. Ret eo eta treiñ diwar embannadurioù gallek ; neuze e tlefe pal an troer bezañ, dreist pep tra,

4

ecunañ an displegadenn ha lakaat anezhi da vezañ ken sklaer ha ken aes ha ma c'heller. Dont a reot a-benn tamm-ha-tamm...

Bez ez eus ivez un nebeut fazioù da c'hwennat e-barzh ar skridoù. Ur fazi hag a gaver kouls lavaret gant holl genlabourerien ar gelaouenn eo hemñ, hag a c'hellfe bezañ reizhet aes-tre (amañ un nebeut skouerioù) :

- Niv. 1, p. 3 : e peurrest Breizh e-lec'h er peurrest eus Breizh (a Vreizh) p.13 : darn vrasañ ar mammoù e-lec'h an darn vrasañ eus ar mammoù darn vuiañ ar babigoù e-lec'h an darn vrasañ eus ar babigoù p.14: darn vrasañ e amzer e-lec'h an darn vrasañ eus e amzer

- Niv. 2p.10-eus tu all ar voger e-lec'h eus an tu all d'ar voger Dalc'hit soñj eus : En tu all d'ar mor don...

— Un draig all (niv. 2, p.10: lavarit da Amelia KUDENNEG ne lavarer ket e brezhoneg «D'am sikour !» met «Forzh ma buhez !»...

R.D., Iwerzhon

Kas a ran deoc'h ur chekenn evit adkomanantiñ d'ho kelaouenn. Hetañ a ran a greiz kalon e harpo da adsavidigezh hon sevenadur broadel. Prest on memes da skrivañ pennadoù eviti ur wech bet distroet d'am bro... N'em eus ken nemet da larout deoc'h : chañs vat en ho labour. A galon ganeoc'h !

Y.B.M., Madrid

Donisian GOULLIN

CARTER

Dilennet eo bet Jimmy CARTER, d'an 2 a viz Du, 39^{vet} prezidant ar Stadoù-Unanet. Dianav a-grenn e oa an den-mañ en diavaez eus Stad Geortjia ur bloaz 'zo. Dastumet en deus koulskoude 51 % eus ar mouezhiadoù ha trec'het en deus eta Gerald FORD (48 %) hag Eugene McCARTHY (war-dro 1 %). Gerald FORD a gendalc'ho avat da ren an traoù betek an 20 a viz Genver 1977 hervez ar boaz er Stadoù-Unanet, hag amzer en devo Jimmy CARTER e-keit-se da glask ha da gavout tud a daivoudegezh da vont gantañ en e ouarnamant.

Un Demokrate eo Jimmy CARTER, tra ma oa Richard NIXON ha Gerald FORD Republikaned. Dilennet eo bet Jimmy CARTER gant mouezhiadoù ar vicherourien, ar vorianed hag ar bihanniveroù all (Amerikaned a orin poloniat, italiat, iwerzhonat, h.a.). An niver brasañ eus ar mouezhiadoù en deus bet e kreisteiz hag e reter ar vro tra ma yae an trec'h gant Gerald FORD e Stadoù ar C'hornog.

Emañ Jimmy CARTER o tont eus an «Deep South» (kreisteiz don), eus Stad Geortjia. N'eo ket gwall-anavezet ar c'hornbro-mañ ha techet e vezer bepred da sellout

ouzh kreisteiz ar Stadoù-Unanet evel ur vro baour-razh e lec'h m'emañ o vevañ ur bern morianed hag ar C'hu-Kluks-Klan oc'h ober e reuz. Soñjal a reer ivez er film kaer «Gone with the Winds» (bountet gant an avel) hag a gonte tonkad kriz un tiegezh er c'hreisteiz e-pad ar brezel-diabarzh, er c'hantved diwezhañ. Trec'het e voe ar C'hreisteiz gant an Norz ha chom a reas ur vro dilezet ha dinerzh e-pad pell amzer.

Roet e voe dezhañ ul lañs nevez gant «New Deal» (kontrad nevez) ROOSEVELT, pa voe boulc'het labourioù bras e traonienn an Tennessee da reñ labour d'an dud dilabour da heul an enkadenn armerzhel bras, ha dreist-holl e tihunans armerzh ar c'hreisteiz e-pad ar brezel-bed diwezhañ. Staliet e voe ennañ ur bern bonoù-brezel ha kampoù-soudarded, savet ur bern labouradegoù nevez o labourat evit an arme. Kresket en deus kalz barr-bevañ ar boblañs abaoe daou-ugent vloaz, daoust ma chom c'hoazh izeloc'h eget ar barr-bevañ keitat er Stadoù-Unanet.

Ganet e voe Jimmy CARTER d'ar c'hentañ a viz Here 1924 en ur gêriadennig eus Georgia, Archery, ha tremen a reas e yaouankiz e Plains, tri mildouar ac'han ha

5



300 km diouzh Atlanta, kêrbenn ar Stad. N'eus nemet 600 annezad e Plains hiziv c'hoazh ha n'eo ket merket ar gêriadennig-mañ war an darn vrasañ eus ar c'hartennoù. N'eus nemet un ugent ti bennak hag un nebeut stalioù e-kreiz ar vourc'h a-hed al linenn hent-houarn.

E dad en doa ur vereuri eno. Krouiñ a reas un afer-prenañ dre vras pistach-douar hag ur stal o werzhañ a bep seurt traoù. Ne oa ket pinvidik-mor an tiegezh CARTER met tud kalz paourc'h c'hoazh a oa en-dro dezhañ, dreist-holl ar vorianed, stank o niver er c'horn-bro. Mirour e oa tad Jimmy CARTER met frankizour e vamm. Ur vaouez souezhus eo houmañ. Klafvdiourez e oa war he micher hag ur roll a bouez e c'hoarias er gêriadenn dre ma ne oa medisin ebet. Un deiz, e 1966 (pa oa dija 68 bloaz) e welas un abaden er skinwel diwar-benn «Emouestlidi ar Peoc'h» (tud a ya da dremen un nebeut bloavezhioù en Trede Bed evit skoazellañ tud paour ar broioù-se). War an taol, e reas he mennoz mont ivez ha tremen a reas e gwirionez daou vloavezh e Bro-India oc'h ober war-dro ar re glañv.

A-drugarez d'an arme e c'hellas Jimmy CARTER ober studioù uhel. Kuitaat a reas e diegezh e 1942 evit mont da Akademiezh

ar Morlu ha tremen a reas 11 vloaz er verdeadurezh-brezel. E 1948 e tremenas e arnodennoù diwezhañ hag e teuas da vezañ ofiser hag ijinour war un dro. Labourat a reas e-pad ur pennad mat war gudenn ar splujerezed derc'hanel (atomek).

En e vuhezskrid (*Why not the Best?*) (Perak ket ar gwir gwellañ) e kont Jimmy CARTER un diviz en devoe un deiz gant an amiral Hyman RICKOVER. Edo o tremen un arnodenn gantañ hag an amiral en doa lezet anezhañ da zibab an danvez. Goude an arnodenn, e c'houlennas an amiral outañ : «Peseurt renk ho poa en Akademiezh ar Morlu?» ha Jimmy CARTER da respont dezhañ : «Aotrou, ar 59^{vet} e oan war ur c'hlas 820 danvez-ofiser» hag an amiral da c'houlenn neuze : «Ha graet hoc'h eus ho kwir gwellañ?». War-nes e voe Jimmy CARTER da respont «Yes» met koun a zeuas dezhañ neuze eus mareoù p'en dije gallet strivañ muioc'h. Setu perak e respontas : «Nann, Aotrou, n'em eus ket graet bepred va gwir gwellañ». Ha neuze an amiral da barañ e sellou warnañ ha da c'houlenn «Perak?».

Ne zisofijas morse Jimmy CARTER an darvoudenn-mañ ha setu perak e tibabas «Perak ket ar gwir gwellañ?» da ditl e levr.

Pa varvas e dad e 1953, e kuitaas al lu hag e tistroas da Blains d'ober war-dro afer an tiegezh. Diaes e voe e vuhez en derou eno gant e wreg Rosalynn (ur plac'h eus ar c'horn-bro en doa kemeret da bried e 1946). Berzh a reas koulskoude ha war greskiñ ez eas e vadoù. Prederiet eo Jimmy CARTER gant e gravez (religion) hag evel e dad e reas e-pad bloavezhioù war-dro Skol ar Sul (katekiz) e chapel badezour Plains. Avieler e voe ivez e-pad pell amzer ha mont a reas da brezegenniñ e chapelioù all ar c'horn-bro. Stagañ a reas d'ober politikerezh hag e

1962 e voe dilennet e Sened Georgia. Klask a reas bezañ gouarnour e 1966 met c'hwitañ a reas en dilennadegoù. En em ginnig a reas adarre hag e voe trec'h ar wech-se. Gouarnour e teuas da vezañ e 1971, da heul Lester MADDOX, ur gouennelour. En eneb, e labouras Jimmy CARTER evit brasaat gwirioù ar vorianed hag e strivas evit kreskiñ o niver er melestradur. Adalek 1972 e reas e soñj da vont d'en em ginnig evel danvez-presidant ar Stadoù-Unanet e 1976 ha setu m'eo deuet da vat e daol gantañ.

Berc'hed

Strad ar mor ravellet


Abae un nebeut mizvezhioù e klemm pesketourien Penn ar Bed dre m'emañ listri-roueder rusian o ravanellif e-tal aodoù Kornog Breizh. D'ur mare m'emañ ar guzuliadeg diwar-benn gwir ar mor o paouez echuiñ e New-York e sav adarre kudenn diwall an tachennoù pesketa.

War c'houlenn melestrour aferioù ar mor e Brest, en deus graet ar ramoker Centaure ur ged-tro, e-tal Enez Eussa. Nevez 'zo, nepell diouzh an enezenn en deus kavet ur pesketour krañked ha givri-mor e gavelloù distrujet gant bigi pesketa Rusian. «Ur wech -eme ur pesketour eus Enez Eusañ- e oamp o pesketa pa weljomp oc'h

erruout ur vag rusian. O tastum hol linennoù e oamp ; ar Rusianed a oa o lakaat o roued-stelf. Tost-tre ouzhomp e oant. Distruj a raent pep tra o tiframmañ ar c'havelloù, troc'hañ al linennoù. Darbet eo bet d'ar vag-se hon troc'hañ e daou. Sinou a rejomp dezhi. Tremenet he deus, 10 metrad diouzhomp... Paz omp distroet da zastum hol linennoù e oa un ugent bag bennak war hon tro. Kollet hon eus 65 kavell, linennoù ha balizennoù. Bez hon eus evit war-dro 10 000 lur frejoù.

N'eo ket ar wech kentañ e c'hoarvez seurt traoù.

Ur re-ober eus an doareoù arnevez da



besketa en deus distrujet ar pesked war vord an aodou. Rediet eo ar besketourien da vont pelloc'h tra m'emañ ar besketourien estren o tostaat. E gwirionez emañ al listri roueder rusiat niverusoc'h-niverusañ war ar morioù. E derou Mor Breizh ez eus ur c'hant bennak diouto. Evel tourterien-vor e rastellont pep tra. Treuzfeurmet e vez ar pesketaerezh diouzhtu war vourz listri-greanti. Chom a reont c'hwec'h miz hep divourzhaf; labourat a reont kalet o treuzfeurmiñ pep tra. «Pa zistro ur vag pesketa breizhat e weler ouzh he heul un tropellad gouelini o krial hag o splujañ en dour evit tapout boued. N'eus labous ebet da heul ar bigi rusiat, n'eus netra da zebriñ evito. Pesketourien rusiat ne zistaolont netra. Gant buzelloù e reont bleud, temz douar, poultr.»

Met n'eus ket hepken listri rusiat e morioù Breizh. Bez ez eus ouzhpenn listri japanat, Koreat, Sinat, Hollandat, Spagnolat. Sunet e vez strad ar mor gant Japaniz, sunan' a reont pep tra

Un dra a zispleg sur a-walc'h bezañ listri rusiat e morioù Breizh. Komz a reer eus bigi-spier. Abaoe ma'z eo diazezet listri-spluj nukleel en Enez Hir, niver ar bigi rusiat a zo dek-kementet.

Seurt kudennoù a savo endro keit ha ne vo skoulmet un emglev a ziazezo da vat penaos e c'hell ur peskerez hengounel kenvefañ gant ur peskerez greantel.

An doare nemetañ da zont a-benn eo astenn an tachennoù pesketa gwarezet da 200 miltir eus an aodou. Sindikadoù ar besketourien o deus savet klemm dirak kannad Bro-Rusia o c'houlenn ivez ma vefent digollet eus an distruj a zo bet graet dezho.

Gwall zister eo sur-awalc'h seurt afer evit gouarnamant Paris. Keit ha ma ne c'hell ket pesketourien Vreizh kemer disentezioù o-unan e-keñver aferioù o tennañ outo war-eeun ez eus peadra da gredif ez aint dalc'hmat da skeifñ ouzh un nor all.

KORN AN ARZOU-KAER

En diavaez eus al lennegezh hag eus ar politikerezh, ne vez ket roet kalz plas er c'helaouennoù brezhonek da dachennoù all eus ar sevenadur hag eus ar vuhez, evel da skouer an arzoù-kaer. Un druez eo hep mar ebet ha mat e vefe d'ar Vrezhonegerien prederiañ, eskemm mennozioù ha krouñ traoù ivez war dachennoù an treserezh, ar c'hizellerezh, al livezh pe an tisaverezh. War an tachennoù-mañ hon eus da zifenn ivez personelezh Vreizh. Mat e vefe d'am soñj embann e-barzh **Keleier an Naoned** pennadoù o tennañ d'an tisaverezh e Breizh hag er broioù all, o tennañ d'an arz a vremañ, d'ar sonerezh-pobl, d'ar c'hoariva, d'ar filmoù, d'ar pladennoù, hag all...

Evidon-me em eus dibabet kinnig deoc'h ur rummad pennadoù gouestlet d'en engraverezh. N'eo ket un doare-tresañ anavezet-tre nag unan implijet kalz kennebeut en deiz a-vremañ, ha koulskoude ez eo unan aes, na c'houlenn na kalz arc'hant, na studioù uhel (bugale vihan a c'hell ober engravadurioù kaer war linoleom da skouer). Un arz poblek eo peurliesañ an engraverezh en abeg da se. Bleuniet en deus dreist-holl d'ar mare pa ne oa ket bet ijinet c'hoazh al luc'hskeudennerzh. Graet e veze engravadurioù evit skeudennaouañ levrioù, evit ober skeudennoù relijiel da lakaat en tiez, evit ober follennoù-kanaouennoù distag a veze gwerzhet er foarioù hag er marc'hadou gwechall. N'eo ket un arz aet da get koulskoude hiziv ha kalz arzourien a ra bepred gantañ, zoken e-touez ar re uhelañ ha brudetañ. Talvoudus e vefe kavout arzourien nevez e Breizh hiziv evit skeudennaouañ hol levrioù hag hor c'helaouennoù brezhonek. Stank eo niver an arzourien e Breizh hag o deus pleustret war an engraverezh ha lezet deomp pennoberennoù gwirion. Setu un nebeut anvioù mesk-ha-mesk : Xavier HAAS, Jean-Emile LABOUREUR, Zavier LANGLEIZ, PHELIPPE-BEAULIEU, Nicolas OZANNE, Olivier PERRIN, Jorj ROBIN, Reun-Erwan KRESTON, h.a... (Diskouezet e voe oberennoù gant ul lod anezho e 1974 e Mirdi an Arzoù-kaer en Naoned, da geñver un diskouezadeg talvoudus bet aozet gant Michel NOURY diwar-benn an engravadur e Breizh.)

N'eo ket oberennoù an arzourien-mañ emañ o soñj kinnig deoc'h avat, oberennoù all ne lavaran ket, evel da skouer engravadurioù gant Albrecht DÜRER, Gustave DORE,



C'HWI 'OAR ? VA MAB EN DEUS BET UR ROLL EN UR PEZH-C'HOARI ER C'HATEKIZ !

Un tangwall en ur vengleuz



Ludwig RICHTER, hag ar zourier all. Evit kregiñ em eus dibabet un engraver nebeut anavezet e Breizh met brudet-bras en e vro, José Guadalupe POSADA (1852-1913) eus Bro-Vec'hiko.

Loig MAINGUET

JOSE GUADALUPE POSADA

Unan eus ar zourier vrudetañ e vro eo José Guadalupe POSADA met kresket en deus e vrud dreist-holl goude e varv rak paour e chomas a-hed e vuhez, daoust da vezañ labourer dibaouez e-pad ouzhpenn daou-ugent vloaz da skeudennaouañ follennoù-kanaouennoù, kazetennoù-pobl, levrioù-kegin, levrioù bugale, kelaouennoù politikel, h.a... Jedet ez eus bet en doa graet e-unan ouzhpenn 20 000 engravadur a-hed e vuhez met an darn vrasañ anezho a zo kollet da vat hiziv siwazh.

Ganet e voe POSADA en Aguascalientes, e-kreiz Bro-Vec'hiko, d'an 2 a viz

C'hwevrer 1852. Baraer e oa e dad, mestr-skol e vreur henañ ha poder un eotr dezhañ. Ganto eta e tapas un tamm deskadurezh met abred-tre e rankas kregiñ da labourat evel an holl vugale baour. Labourat a reas da gentañ gant ul liver. E 1868 ez eas da labourat evel deskard e stal ur mouler, José Trinidad PEDROZA, hag eno e teskas ar vicher engraver (war goad, metal ha maen). Evel maendreser e labouras dreist-holl er penn-kentañ. Gantañ e voe graet da skouer flemmskeudennoù politikel er gelaouenn *El Jicote*, embannet gant PEDROZA. En tresadennoù-se e tiskoueze



La inundacion de León en 1888 (al lifivadenn e León e 1888)

10



Laeron-vugale

dija pegen donezonet e oa.


E 1872, ez eas PEDROZA da staliañ e afer e kêr León, e Stad Guanajuato. POSADA a guitaas eta Aguascalientes, e gêr c'henidik, evit heuliañ e batron. E 1873,

avat, e tistroas PEDROZA da Aguascalientes met lezel a reas POSADA e penn ar stal e León. E 1876 e werzhas dezhañ ar stal-se. Leun a vuhez e oa neuze kêr León ha labour en doa POSADA digant an tiez-kenwerzh a



11

El comercio (ar c'henwerzh) : mere'hed o klemm en abeg d'ar gervez



Choque de un eléctrico con un carro funebre (kenstok un tramgarr hag ur c'harr-kañv)

werzhe segalennoù, gwin hag evajoù all. Ur bern tresadennoù kenwerzhel a rae evito. Tresañ a rae ivez skeudennoù relijiel hag ur bern tresadennoù evit ar c'helaouennoù (peogwir ne oa ket c'hoazh a luc'hskeudennoù ganto d'ar mare-se). Kaer-tre co oberennoù POSADA er mare-se met hengounel a-walc'h e chom o doare.

Dimeziñ a reas POSADA e 1875. Etre 1884 ha 1888 e voe ivez, ouzhpenn e vicher, kelennet war ar maouezeserezh en ur skol eil derezh e León. E 1888 e kuitas León evit mont da gêr Vec'hiko, ar gêrbenn. Ne ouzer ket re vat perak e kuitas León. An abeg a zo marteze al liñvadennoù drastus a reas o reuz e kêr León en nevez-amzer 1888.



Peste en el campo (bosenn war ar maez)



Mujer que mata a sus pequeños niños (maouez hag a laz e vugale vihan)

Ouzhpenn-se e oa muioc'h a labour evitañ moarvat er gêrbenn.

Eno e kendalc'has da labourat evit tiez-kenwerzh met labourat a reas ivez muioc'h-mui evit kazetennoù frankizour. E 1890, e skoulmas un emglev gant Antonio Vanegas ARROYO, un embanner leun a ijin, hag a skigne dre ar vro a-bezh levrioù marc'had-mat, kanaouennoù war follennoù

distag ha skeudennoù moulet war baper d'ister-tre met gant livioù flamm, o tennañ da zarvoudoù a bep seurt c'hoarvezet e Bro-Vec'hiko : torfedoù, gwallzarvoudoù, burzhudoù... (un tammig e giz ar skeudennoù a c'heller gwelout e Mirdi Breizh, e Roazhon, pe e giz «skeudennoù Epinal» e Bro-C'hall. Ar skeudennoù-se a oa a-bouez-bras en ur vro e lec'h ma ne ouie an darn



Un asalto en Tepitío (un argadenn e Tepitío)



Ar prizoniad

vrasañ eus an dud na lenn na skrivañ. Brudañ a raent tud eus an amzer dremenet pe eus an amzer-vremañ, torfedourien alies,

sellet outo evel harozed gant ar bobl. Un doare «lennegezh pobl» evit tud dizesk e oa eta oberennoù POSADA...



Lakidigezh d'ar marv



MADERO hag e zalc'hidi

Mervel a reas diwar ur c'hleved prim d'an 20 a viz Genver 1913 tra ma rae ar brezel-diabarzh e reuz er vro.

E Mec'hiko evel e Breizh, en deus c'hoariet bepred an Ankoù ur roll a bouez er sevenadur pobl. War demploù kozh ar Vayatz hag an Aztekiz e oa dija ur bern

klopennoù hag eskern kizellet er maen (evel maz eus war hor chapelioù e Breizh alies). Un devezh sebezus eo Gouel an Annon, an deiz war-lerc'h an Hollsent (2 a viz Du), e Bro Vec'hiko. Klopennoù a vez gwelet o pep lec'h, klopennoù e sukr, e bara, e kartofs, e pri... C'hoari a ra ar vugale gant frammoù -eskern e koad, e paper, e kartofs. Mont a ra an holl Vec'hikaned d'ar beredoù evit tremen an devezh war ar bezioù. Debrif, pediñ, evañ, c'hoari kartoù, kanañ, kousket



La despedida del revolucionario (kimiad an dispac'hour)

a reont war ar beziou... Awenet e voe POSADA gant an hengoun-mañ hag un darn vras eus e oberennou a zo enno *calaveras* da lavarout eo «klopennoù» pe (dre ledanaat ar ster) «frammoù-eskern». Un digarez e voe alies an dra-se evit flemmskeudennou politikel... Kement-mañ a ro d'e oberenn un doare dezhi hec'h-unan souezhus a-walc'h.

Awenet e voe POSADA ivez gant darvoudoù e amzer ha gant istor e vro. Gellat en dije chom d'ober tresadennoù evit tiez-kenwerzh met dibab a reas kemer perzh er stourm politikel, en e zoare dezhañ. Bevañ a reas da vare ar jeneral Porfirio



Emiliano ZAPATA

16

DIAZ (1830-1915). Hemañ en doa stourme en un doare kalonek-meurbet a-enep d'ar C'hallaoued er bloavezhioù 60 (aloubet e oa bet Mec'hiko gant soudarded Napoleon III) ha dont a reas da vezañ prezidant ar vro e 1876. Un diktatour e teuas neuze da vezañ ha, pezh a zo gwashoc'h e'hoazh, e werzhas ar vro d'an estren. Edo ar Reverzhi C'hreantel o kregiñ er vro. Lezet e voe ar c'hevreadoù bras eus Norzamerika hag Europa d'ober kement a blij dezho ha da aloubiñ pinvidigezhioù naturel ar vro. E krabanou un nebeut bourc'hizien binvidik-mor ha kevredadoù estren e kouezhas darn vrasañ an douarou mat, ar mengleuzioù, an hentou-houarn, an ijinerezhioù greantel, h.a... Damsklaved e teuas da vezañ al labourerien-douar, diaes-kenañ buhez ar vicherourien ha skrijus tonkad an Indianed. Setu perak en em gave Mec'hiko en ur stad rakdispac'hel e derou ar c'hantved ha war ledanaat ez ae ar birivilh e-touez al labourerien-douar, ar vicherourien hag ar gefredourien (intelektualed) met mouget e oa didruze gant ar gouarnamant kement eneberezh.

Porfirio DIAZ hag a rae van da zoujañ lezennoù an demokratelezh, en em ginnigas adarre en dilennadegoù e 1910 hag e voe dilennet adarre evel-just («aozet» e oa pep

tra evit se) daoust da enebadur ur bern tud dre ar vro. E-touez ar re o devoa savet o mouezh a-enep d'an diktatour, e oa ur breutaer pinvidik eus norz ar vro, Francisco MADERO (1873-1913). Un den onest e oa ha kredif a rae en demokratelezh. Taolet e voe en un toull-bac'h gant polis an diktatour met dont a reas a-benn da dec'hout kuit e norz ar vro. D'an 20 a viz Du 1910 e tarzhas an Dispac'h hag e meur a lec'h e voe krogadoù a-enep d'ar bolis ha d'an arme. Degemeret e voe MADERO evel ur Salver gant an holl. E pep lec'h ma tremene e teue ur mor a dud da youc'hadegiñ dezhañ. Diskenn a reas goustadik eus an norz betek ar gèrbenn. Pa erruas e kêr Vec'hiko en nevez-amzer 1911, gantañ miliadoù a zispac'hourien, edo an diktatour kozh o paouez tec'hout da Europa.

Un nebeut mizvezhioù war-lerc'h e voe anvet MADERO da brezidant ar vro. Ne oa gantañ, avat, aozadur frammet ebet ha ne deuas ket a-benn da unvaniñ ar vro hag a oa bepred o virvif. Ret e voe dezhañ zoken kas an arme da stourm a-enep da emsavidi 'zo evit klask degas an urzh en-dro. Neuze, unan eus e jeneraled, Victoriano HUERTA (1845-1916) en em savas a-enep dezhañ hag a gemeras g lec'h. E zrouklazhañ a reas nebeut goude, e miz C'hwevrer 1913, ur miz



Peregrinos de Chalma (pire'birined war hent Chalma)

17



Levrioù-kanaouennoù



Golo ul levr

goude marv POSADA.

Unan eus an dud a c'hoarias ivez ur roll a bouez e Dispac'h Mec'hiko hag a gaver alies en oberennoù POSADA, eo Emiliano ZAPATA (1873-1919). Ar c'houer indian paour-mañ a stourmas evel ul leon a-hed e vuhez evit difenn gwirioù al labourerien-douar (n'eo ket da vezañ keñveriet e doare ebet gant Pancho VILLA hag a oa ur forbann ha netra ken). Stourm a reas ZAPATA a-enep d'an holl gouarnamantoù en em heulias etre 1910 ha 1919 rak hini ebet anezho ne zalc'has d'e bromesaoù ha ne roas an douar d'al labourerien-daouar. Drouklazhet e voe Emiliano ZAPATA e 1919 dre un taol-trubarderezh.

19 Dek bloavezh e padas Dispac'h Mec'hiko ha lezel a reas war e lere'h ur

milion a lazhi ha dismantrou diniver dre ar vro pa echuas e 1920. E meur a gefver e voe un dispac'h c'hwitet. N'en deus ket bevet POSADA betek dibenn an dispac'h spontus-se -gwell-a-se evitañ- met lakaet en doa ennañ e c'hoanag. Un arzour engouestlet e voe a-hed e vuhez, a-du gant ar frankiz ha gant gwirioù ar bobl. Gant e engravadurioù e stourmas a-enep d'an diktatouriezh. Ne vije ket bet tu da gomz eus an oberenn ha buhez POSADA hep komz eus Dispac'h Mec'hiko rak stag int o-daou. Daoust pegen pell e seblant bezañ Bro-Vec'hiko hag amzer BOSADA, e c'hell bezañ talvoudus-tre evidomp-ni Bretoned da studiañ oberenn un den hag en deus bet kement a garantez evit e vro hag e bobl.

Yann Bart (Kendalc'h)

II

Ar c'homodor en em dennas neuze eus ar prizon, hag ar gouarmer, en ur vont kuit, a lavaras d'an tri frizoniad :

— *Ur c'heloù mat am eus da reiñ deoc'h, a-benn tri devezh amañ e viot kaset da Londrez.*

Pa voant aet kuit, an tri martolod a lavare etrezo :

— *Ret eo deoc'h tec'het en noz-mañ, eme Robert.*

— *Ha te, n'ec'h eus ket a soñj da dec'het ? N'out ket pare a-walc'h ?*

— *Nann, me a chomo amañ. Me ho sikouro da sevel dre ar prenestr, hag ur wech ma viot e Frañs, c'hwi a lakay va cheñch ouzh ur Saoz bennak. An dra-se a vezo aes deoc'h da ober ; me n'em eus ket a vrud.*

Ya, mes ezhomm o doa eus ar medisin, hag ar medisin ne deue ket. Antronoz e teuas koulskoude. Youn a deuas gantafi, hag en lezas e-unan. Mes goude m'oa aet kuit, e teuas goustadik da sellet dre doull an alc'houez hag o c'havas o-fevar o kuzulat.

— *Ha, boued ar gounnar, eme Youn, me ouie ervat, c'hwi 'zo o klask ober un taol fin bennak ! Warc'hoazh ni welo ! Me lakay kregiñ er medisin-se !*

A-benn un hanter- eur pe war an dro, ar medisin a skoas war an not evit goulenn mont kuit. Paotr ar c'har goad a yeas un nebeut a-dreñv, hag a deuas goude-se en ur stirlinkat e alc'houezloù. N'en doa ket a c'hoant e vije santet edo e fri e toull an alc'houez. Goulenn a reas ouzh ar medisin :

— *Echu eo ho labour ?*

— *Ya, eme ar medisin.*

— *Da bet eur e teuot war-c'hoazh ?*

— *Da zek eur evel hiziv.*

Paotr ar c'har goad a lavare outafi e-unan : kae atav, warc'hoazh me lakay kregiñ enout !

Hogen en noz-se, da un eur diouzh ar mintin, e klevjed trouz un nebeud grae taolet ouzh prenestr ar prizon.

Yann BART a grogas neuze ar paz ennañ. Nennezh oa ar sin etre ar medisin hag i. Neuze FORBIN a sav war divskoaz BART, a beurzistag ar varrenn houarn, hag a ziskenn er ru war-bouez ur gordenn golo blaifsonet ganto, hag a behini Robert a zalc'he ur penn.

BART a savas goude war divskoaz Robert hag a ziskennas evel FORBIN. Robert a deuas neuze buan d'en em deurel e-touez e golo hag en em lakaas da roc'hat ker kreffiv ma vije klevet eus an eil penn d'egile eus ur c'hazarn. Mat oa dezhañ, rak Youn ne gouske ket hag a deue bep an amzer da selaou e-kichen dor ar prizon. Hogen dinec'h e chome o klevet roc'hadenoù Robert, hag e lavare : Ya, ya, kousk, roc'h, warc'hoazh, c'hwi welo !

Etre-daou, BART ha FORTIN, hag ar medisin ouzh o blieniañ, a oa aet d'ar porzh-mor, hag a save en ur vagig-pesketa. Ar medisin a oa bet en o-raok hag en doe roet lousoù-kousket da berc'henn ar vag-se e-touez gwin-ardant. Lakaet en doa er vag un tamm boued bennak hag ivez unan bennak eus ar benviajoù a oa ret da gaout. Ar porzh-mor a oa goloet a listri-brezel. Dre ma tremenent e biv da ul lestr, ar martolod e gward a grie outo. Hogen BART a ouie ur ger saoz bennak hag a responte bewech : *Pesketaerien !* ha neuze e lavared dezho en em bellaat. Krediñ a c'hellit, an daou gamalad ne c'houlennent ket gwell. Tremena re jont evel-se dre greiz an holl listri a oa eno.

Hogen lezomp BART ha FORBIN war ar mor ha deomp da gaout Robert chomet er prizon.

Da zek eur, hervez e gustum, Youn a deuas da zigeriñ. Ar medisin ne oa ket deut. Robert a roc'he atav. Pa glev ar jolier, e sav war e ilin, e tigor e c'hinoù da zisveliñ yen hag e c'houlenn :

— *Pet eur eo ?*

— *Me n'on ket un horolaj, eme Youn, pelec'h emañ an daou all ?*

— *En o gwela, kredapl. Me n'on ket karget d'o dihanañ.*

Paotr ar c'har goad a yeas kuit war gement-se, mes da unnek eur e teuas adarre, hag ez eas neuze betek al lec'h ma kouske an daou all. An daou labous a oa nijet kuit. Da gentañ e chomas sebezet da sellet en-dro dezhañ, mes e lagad a gouezhas souden war ar prenestr aet ur warrenn-houarn anezhañ, hag eñ neuze da leuskel unan eus ar brasañ leoùdouet zo bet laosket biskoazh e Bro-Saoz. *Aet kuit !* emezañ.

Robert a savas neuze en ul lamm en e sav.

— *Petra, emezañ, aet kuit ha lezet ac'hanon-me ?*

Hag en em lakaas da zornafi a-enep d'an daou drubard a oa tec'het hep lavaret ger dezhañ. Mard oa droug er jolier, Robert a ziskouezze e oa muioc'h c'hoazh ennañ. O klevet an trouz, gwardoù ar prizon a ziredas hag ar gouarmer a ziredas ivez.

— *Petra 'zo ?*

— *An daou drubard, eme Robert, an iaou vastokin zo tec'het kuit ha va lezet-me amañ !*

— *Petra ? Ne ouiec'h ket petra o doa soñj da ober ?*

— *Ma'm bije gouezet, Aotroù gouarmer, me ne vijen ket chomet amañ war o lerc'h.*

— *Ne ouzoc'h ket peseurt hent a dleent da gemeret ?*

— *Pelec'h ec'h oufen-me ? Me garje gouzout evit mont war o lerc'h hag o fasañ, an div groudenn !*

— *Dre vor e vezint aet kredapl ?*

— *Dre vor ? Ya, ha penaos mont dre greiz ho listri-brezel a zo aze leun ar porzh-mor ganto. Ha ! pa soñjan ; BART en deus lakaet ober ur botou-ler nevez, hag a lavare ouzh o gviskañ : ar re mañ zo mat da vale.*

(da genderc'hel)





KUDENN EUSKADI HA KELENNADUREZH AN EUSKAREG EN IKASTOLAS

Luc'hvannadur ha prezegenn gant Yann TREL LU

Lodenn gentañ : kudenn Euskadi. Ar vro, he douaroniezh, hec'h armerzh, hec'h istor. Eil lodenn : GURE MINTZAIRA (hor yezh). Orin an euskareg, e istor, gwikefreoù an trevadennerezh sevenadurel gouzañvet gant Euskadi, roll noazus ar skinwell gall. Pinvidigezh ar sevenadur pobl. Ar stourm evit ar yezh : an ikastolas, an doare nemetañ da saveteiñ an euskareg.

(Aozet eo bet an abadenn-mañ gant skoazell ar gevredigezh SEASKA hag he deus krouet an ikastolas en Euskadi an norz. SEASKA, Musée Basque, rue Marengo 64100 BAYONNE)

D'ar merc'her 19 a viz Genver da 8.30 noz et ti ar yaouankiz hag ar sevenadur e Reze (bali an Dauphiné REZE pg (40) 75.57.28.)

22

Buhez sevenadurel e Bro-Naoned

DU

- 6 Fest-noz en Endr-Izel (An Endreziz)
- 7 Bodadeg-vloaz «Bretagne-Vivante» er Sicaudais
- 10/14 Devezhioù-studi biniou ha bombard e Gwenrann (KSIB)
- 13 Fest-noz en Endr-Izel (Kelc'h Breizhek an Naoned)
- 14 Sonadeg JEGAT hag YHUEL en Oraour-Botrel
- 16 Abadenn ganaouennoù gant Jil SER-VAT en Naoned (sinema «Paris»)
- 16 Abadenn ganaouennoù gant Evgen KIRJUHEL (Ti al Labourer Yaouank)
- 18 Koan ar Vrezhonegerien en Naoned
- 20 Fest-noz en Oraour-Botrel (An Endreziz)
- 20/21 Dibenn-sizhun brezhoneg e Gwenrann (KSIB ha Skol an Emsav)
- 21 Sonadeg JEGAT hag YHUEL e Gwenrann
- 21 Goueliad e Sant-Nazer (KSIB)
- 21 Korolladeg vreizhat en Endr-Izel (An Endreziz)
- 25 Abadenn ganaouennoù gant Jil SER-VAT e Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur en Dervallières en Naoned
- 26 Abadenn ganaouennoù gant Jil SER-VAT e Ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur e Sant-Brewen

- 27 Fest-noz er Baol (U.D.B.)
- 27 Fest-noz en Endr-Izel (Kevredigezh ar C'herent dezho bugale bouzhar)
- 28 Korolladeg vreizhat e Jans (Kelc'h Keltiek Jans)
- 28 Korolladeg vreizhat ha kenstrivadeg sonerien er Poullig Gwenn

KERZU

- 4 Fest-noz en Endr-Izel
- 4 Fest-noz e Vertou
- 4 Fest-noz er Groazig (Korollerien ar Mor)
- 11 Fest-noz en Naoned
- 11/12 Dibenn-sizhun biniou ha bombard e Gwenrann (KSIB)
- 16 Koan ar Vrezhonegerien en Naoned
- 17 Sonadeg gant JEGAT hag YHUEL en Naoned (KSKBN)
- 18/19 Dibenn-sizhun brezhoneg e Gwenrann (KSIB ha Skol an Emsav)
- 23 Sonadeg hag abadenn kanaouennoù ha barzhonegoù e Sant-Nazer, dindan, un deltenn vras, gant Claude BESSON, DJIBOUTJEP hag ar gevelour NEVENOE (Kreizenn Sevenadur Pobl)
- 26 Goueliad e Sant-Nazer (KSIB)

HA KASET HOC'H EUS GWERZH HO KOUMANANT-BLOAZ EVIT 1977 ?



Koumanant-bloaz : 50 L - Koumanant evit an dud a zo treut o yalc'h : 25 L
Tefzoriez :

Madame Gwenola ROSSINYOL - 11, rue de l'Ascension - 44700 ORVAULT

23

GERIOU-KROAZ


GANT Padrig FAVEREAU

Diskoulm an niverenn 2

1	L	2	E	3	V	4	E	5	N	6	E	Z		7	E
8	A	N	A	O	U	T				9	O	N			
10	M	E			N			11	R	12	O	D			
	M		13	E				14	E	R	E				
15	A	16	L	L	17	A	18	S						19	S
20	T	O	U	T	E	K				22	P	E			
		23	U	M			24	R	A	25	N				L
26	U	S				27	D	R	S	E	L	L			

Wanig ha Wenig

Koumanant-bloaz : 10 L



Chomlec'h : WANIG HA WENIG
Keraloret 29249 GWISENI